

Bilañs buhezegel Emglev Bro Douarnenez 2024

Agathe Seïté ha Maxime Touzé, Ken-brezidanted.

Ur blijadur eo deomp degemer ac'hanoc'h ur wech c'hoazh, ken niverus, evit emvod-meur Emglev Bro Douarnenez, daoust d'an amzer ken brav.

Laouen omp o kinnig deoc'h bilañs ar bloavezh 2024, ur bloavezh hag a zo bet leun-chouk evidomp-ni. Gortozet e oa, gant lid kantveder harz-labour merc'hed ar friturioù ha n'omp ket bet dipitet me 'lâr deoc'h. Skipailh Emglev en doa gouestlet kalz amzer d'ar raktres-mañ : da vare emvodoù ar c'henstroll dibaoe miz Mae 2023, atalieroù e-barzh ar skolioù, ar prantadoù pleustriñ evit ar Mell Kanadeg pe c'hoazh da goulz an 23 a viz Du pa voe lañset an traoù war un ton bras. An darvoud-mañ, Mell Kanadeg ha bal breton asambles, a zo bet en tu all eus ar pezh hon dije ijinet, e-keñver an niver a dud a zo deuet (ouzhpenn 1500 evit ar fest-noz) met ivez e-keñver kalite ar pezh zo bet kinniget. Sizhunioù war-lerc'h e kendalc'homp da glevet traoù mat, ar pezh a dalvez e talvez ar boan.

Raktresoù a seurt-se a vod an dud, a grou liammoù kenetrezomp, etre an holl aktored sevenadurel amañ e Douarnenez.

Met Emglev Bro Douarnenez zo muioc'h eget ar pezh zo bet da geñver Dispar Amzer hag an 23 a viz Du. Dav eo kaout soñj eus al labour vras a vez kaset da benn evit treuzkas mod pe vod ar brezhoneg ha sevenadur Breizh : evit ar vugale gant an atalieroù Treuzkas, evit ar re vras da goulz Tavarnioù pe predoù e brezhoneg, evit an dud eus ar vro da geñver atalieroù war an douarnenezeg, evit an dud o tont eus lec'h gant gweladennoù ofis an douristed hon eus kemeret perzh en enno.

Evidomp-ni eo bet ivez ar bloavezh 2024 ur bloavezh leun a c'houlennoù hag a cheñchamantoù. Aet eo kuit Olivier, hor goprad kentañ met ivez Jeanne. Ar fed e oa aet kuit daou c'hoprad hag ar fed omp bresk a-walc'h a-fet argant a lak ac'hanomp d'en em soñjal kalzik war ar raktres a fell deomp kas war-raok, ha penaos. Tristik eo ar mare evit ar c'hevredigezhioù hag ar bed sevenadurel, etre an digresk war ar yalc'hadoù hag ideologiezhioù flaerius o c'hounit tachenn. 2025 a vo hep mar ebet ur mare pouezus evidomp-ni holl.

Met daoust da se e ouezomp mat e Emglev Bro Douarnenez e c'hallomp teurel perzh en ennomp : ur skipailh a-vicher a-galite ha youlek, tud ar c'huzul-merañ leun a startijenn ha perzhiek-kenañ, tud a youl vat laouen da reiñ an dorn pa vez ezhomm ha kevelerien feal.

Trugarez deoc'h c'hoazh da vezañ amañ, hiziv muioc'h eget biskoazh rak bezañ harpet ganeoc'h a dalvez ne labouromp ket evit netra. Trugarez !